

A

R C'HAZHIG
PENN-SKANV



N

AR C'HAZH BIHAN PENN-SKANV

gant Anne Pierjean
Skeudennoù gant G. Viannini
Brezhoneg gant Riwal Huon

Er vro ma komz al loened, emañ
Luduenn ar Vamm-Gozh ha
Ludu an Tad-Kozh o vevañ
en ul lochenn e-kreiz ar c'hoad.

Daou gazh kozh fur-tre ez int, gwer
o daoulagad ha griz o blev evel blev
al logod :

Atav e vezont asambles. Bale a reont
kichen-ha-kichen hag evel ma'z eo
freskik an amzer o deus gwisket o
mantilli gloan.

Copyright : Bias, 1952. Texts and illustrations.
Copyright : Al Liamm, Brest, evit an droidigezh, 1976.

Ti moulañ « GRAPHE », Etables-sur-Mer. Diskleriet hervez lezenn eil trimiziad 1976.



Al laboused hag int a zo mignoned rak, er vro-se, ar c'hizhier ne zebront nag al laboused nag al logod.

Ur voc'hig-ruz a ya d'o heul en ur zarnijal eus ur skourr d'unan all evit marvailhat ganto.

A-daol trumm e youc'h Luduenn ar Vamm-Gozh :

— Me 'gred e welan un dra bennak du-hont, dindan ur bodad bokedoù Sant-Jozef, met n'ouzon ket mat petra eo ! Va faour kaezh daoulagad n'int ket mui gwall lemm !

— Tostaomp un tammig ! eme Ludu an Tad-Kozh en ur lakaat e lunedoù ... Gwir eo, Luduenn, gwelout a ran me ivez un dra bennak. Ur c'hazhig eo ! Ur c'holen-kazh du-pod, gant ur gurunenn wenn en-dro d'e zaou lagad ! Iskizat kazhig ! Krediñ a rafec'h ez eus lunedoù gantañ !

— Na bihanik eo ! a hop Luduenn o teredek.

Ar c'hazhig, spontet, en em damolod e-mesk ar geot. Bleunioù Sant-

Jozef o deus graet un doenn a-us d'e benn, hag an delioù hir evel lerennoù o deus e baket evel en ur gaoued. Stouiñ a ra Luduenn davetañ. E don ar gaoued c'hlas e tamwel daoulagad leun a spont hag ur fri bihan o suc'hellat.

— Arabat gouelañ, kazhig kollet ! Kavet e vo en-dro da vammig ! Met ret eo dit lavarout deomp hag-eñ e teuez a-bell ?

A-bell ? Ne oar ket !

Dec'h e kave hir e amzer. Hegaset en deus e vreudeur. Ar re-mañ o deus e grafignet. Klevet en deus e begement gant e vamm. Neuze, daoust ma oa difennet outañ, ez eo aet er-maez. Aet eo kuit, fuloret-ruz, da n'eus forzh pelec'h !

— Redet am eus a-hed an deiz, hag ul lodenn eus an noz zoken, ken na oa mui va favioù evit va dougen !

— Piv a c'hellfe lavarout hiroc'h deomp ? en em c'houlenn Luduenn.

— Ne welan nemet Hini Fur ar



C'hoad : ar Gaouenn Gozh.

— Ma, deomp eta da zisplegañ dezhi hor c'hudenn ! eme Loduenn.

Evel ma 'z eo splann an deiz, emañ ar Gaouenn Gozh o kousket.

Un eurvezh pe dost a zo ret evit he dihuniñ. Hag un eurvezh all evit displegañ dezhi pep tra.

Ur wech m'he deus komprenet e lavar :

— Laouen-bras e vefen d'ho sikour, met penaos e c'hellfen anavezout ar c'hazhig-se ? Ne vezan war vale nemet en noz, hag en noz e vez-eñ o kousket ! Ez an d'ho kas da di Bran Du hag e c'houlennin diganti ober enklaskoù war an afer-se. It d'he gwelout eus va ferzh ha kasit ar gerig-mañ dezhi!

Treiñ a ra he c'hein, tennañ ur bluenn eus hec'h askell hag he soubañ en ur vouarenn darv-mat a servij dezhi evel pod-liv. Skrivañ a ra buan-habuan tri ger war un delienn-derv.

Ankeniet-bras eo Loduenn :



— O, Kaouenn Gozh, c'hwi 'oar emañ Bran Du o chom e lein ar sapinenn uhelañ ! Penaos e c'hellimp pignat betek eno gant hor paviou kozh ?

— Goulennit digant Laer-Kraoñ, ar gwiñver ! Laouen e vez da gas lizhiri pa vez roet dezhañ teir graoñenn evit e boan.

— Trugarez deoc'h, Gaouenn Gozh. Trugarez evit pep tra.

Ar c'holen-kazh, mezhek an tamm anezhañ, a soñj e ro trubuilh da galz a dud hag en em guzhat a ra diouzh e wellañ etre paviou Luduenn a zo ouzh hen dougen. N'eo ket mui ken reuzeudik rak soñjal a ra:

Gant sikour Luduenn ar Vamm-Gozh ha Ludu an Tad-Kozh,

Gant sikour ar Vran Du war he sapinenn,

Gant ar porzhier Laer-Kraoñ

Ec'h adkavin mammig, sur mat !

Emañ Laer-Kraoñ azezet war ur c'hef ouzh troad sapinenn Bran Du.

Kraoñ a zo gantañ hag emañ ouzh o c'hriñnat.

Ha Ludu da ginnig dezhañ teir c'hraoñenn melen-aour ha da c'houlenn a vouezh izel :

— Te, Laer-Kraoñ, eo porzhier Bran Du ?

— Ya, me eo !

— Daoust hag e c'hellez kas ar bapenn-mañ dezhañ ?

— Eveljust, met displegit din da gentañ ar pezh a c'hoarvez !

An daou gazh kozh a gomz war un dro hag a-boan ma selaou Laer-Kraoñ outo, ha setu, pa 'z erru e beg ar wezenn, en deus ar porzhier skañve-benn disoñjet pep tra. Ne oar mui petra eo an istor. Kontañ a ra n'eus forzh petra en ur veskañ an darvoudoù.

— Ne c'hellez ket bezañ spisoc'h, a c'hourdrouz Bran Du,... Ur c'hazhig eo, mat... pe anv en deus ar c'hazhig-se ?

Laer-Kraoñ ne oar ket. Stouñ a ra e benn etrezek an douar hag e c'hou-



lenn :

— Pe anv 'peus, kazh kollet ?

— Va anv a zo Fri-lous.

— Petra 'fell dit ?

— Adkavout Mammig.

Bran Du a zo trist e beg ar sapi-nenn.

— A ! Ma vefen c'hoazh yaouank e vefe aes din ! Ya, gwechall ne oa ket va divaskell pounner evel plom, er mare-se ec'h anavezen an holl loened tro-war-dro. Siwazh ! bremañ e choman war va c'hlud ha ne anavezan ket mui kalz tra ! ha peseurt stumm a zo gant ar c'hazhig-se ?

— Bihan-tre ha du-pod.

— Lavar din c'hoazh penaos eo ?

— Bez en deus ivez blevennoù gwenn en-dro d'e zaoulagad, stumm lunedoù dezho.

— Lunedoù gwenn, eme Vran Du. Gwechall e ti-feurm Toull ar Bleiz e veve kizhier lunedoù gwenn. Ar Fri-Lous-mañ a zo marteze ur mab bihan dezho.

Ha Bran Du da sevel sonn war he zreid ha da goagal teir gwech diouzh renk : Kroa ! Kroa ! Kroa ! kement-se evit gervel he sekretourez an dimezell Pig.

N'he deus ket bet amzer da zis-tagañ he c'hoagadeg diwezhañ m'emañ dija an dimezell Pig en he c'hichen.

Ar vran a groz dezhi : Dimezell ! c'hwi 'oa a-dreñv an delioù o selaou, pet gwech em eus lavaret deoc'h ne oa ket brav bezañ kurius.

— Va digarezit, Itron Bran Du, fri-furch on un tamm evel pep pig, met ur sikour bras eo evidoc'h e vefen fri-furch ! Gwelout a ran pep tra, gouzout ha klevout a ran ivez pep tra ! Setu perak e c'hellan displegañ deoc'h pep tra. N'eo ket dav deoc'h komz, klevet am eus an istor. Nijal a ran a denn-askell betek Toull-ar-Bleiz da gas ar c'heloù d'ar vamm-gazh hag e tistroin da gerc'hat ar c'hazhig kollet. Sur on emañ-eñ o chom e Toull-ar-Bleiz.



Pelec'h emañ al lampon bihan a dec'h diouzh ti e dud ?

Ouzh troad ar wezenn emañ. An dimezell Pig a sell pizh outañ en ur lammat a-gleiz hag a-zehou.

— Koant ha jentil out, met ul lampon out ivez ! Ma, poent eo din mont da gas keloù d'az mamm !

— O, mar plij deoc'h, dimezell Pig, lavarit dezhi... chom hep krozal din !

— Ne lavarin netra eus ar seurt-se, a respontas an dimezell, skandalet e vi ha gwell a se evidout.

An dimezell Pig he deus klasket un toull etre ar skourr hag an oabl ha, Frtt, nijet eo kuit.

E fri en aer, e sell Fri-Lous ouzh ar big o nijal en oabl. Daeloù a gouezh a-hed e friig.

— Arabat gouelañ, eme Laer-Krañ, da vamm ne c'hourdrouzo ket kalz ganez, ken eurus e vo ouzh da welout en-dro. Met arabat vo dit tec'hout adarre rak marteze ne vo mui evit da sikour :



*Na Luduenn ar Vamm-Gozh na
Ludu an Tad-Kozh,
Nag ar Gaouenn Sioul,
Na Bran Du ar sapinenn,
Na me zoken, Laer-Kraoñ, he for-
zhier, nag an dimezell Pig he sekre-
tourez !*

E beg ar wezenn bin e klever dija mouezh Bran Du.

— Emañ an Dimezell Pig o tont en-dro ! Tostik-tre edo an ti-feurm !

Diskennet eo an Dimezell Pig war ar c'hinvi hag e tosta war-raok en ur lammikat evel ur mekanik bihan koantik.

Petra he deus-hi gwelet ? Ur bern traoù, sur mat !

Gwelet he deus, da gentañ, ur vamm-gazh o ouelañ hag o c'hervel : « Fri-Lous, Fri-Lous » d'ar pevar avel.

Gwelet he deus a-dreñv ar gazhez c'hwec'h kazh bihan, troñset o lostoù ha divskouarn sonn ganto, o ouelañ en o lunedoù gwenn hag o viaoual a-bouez-penn : Fri-Lous. ! Fri-Lous !

Pelloc'h c'hoazh he deus gwelet plac'h vihan an ti o teurel he blev hir a-gostez evit huchal kreñvoc'h a se :

— Fri-Lous, Fri-Lous bihan, Fri-Lous koant !

Hag emañ loened bihan an ti-feurm, holl mesk-ha-mesk, an eil war-lerc'h egile o youc'hal hag o vlejaj : Fri-Lous, Fri-Lous, Fri-Lous mignon !

Dimezell Pig he deus lavaret dezho neuze :

— Na ouelit ket mui ! Selaouit ! Adkavet eo bet Fri-Lous ! Kas a ran anezhañ en-dro deoc'h ! Met arabat 'vo e chikanañ re.

Holl a-unan e respontont :

— Hen touiñ a reomp, ne raimp ket ! Trugarez deoc'h !

— Poent eo dit distreiñ d'ar gêr bremañ, eme Luduenn ar Vamm-Gozh, arabat dit redek bro ken, ha na zisoñj ket ez peus roet trubuilhoù :

D'ur Vamm gazh,
Da c'hwec'h breurig,



D'ur plac'hig hag a ouele dourek
ha d'an holl vignoned eus an ti-feurm.

Na zisoñj ket ez peus direnket:

Luduenn ar Vamm-Gozh,

Ludu an Tad-Kozh,

Ar Gaouenn Fur,

Ar Vran Du,

Al Laer-Kraoñ,

Hag an dimezell Pig.

Na zisoñj morse an dra-se, kazhig
penn-goulllo a zo ac'hanout !

Fri-Lous ne lavar netra, bountet
en deus e fri hag e zivskouarn etre e
bavioù. Un tamm mez h en deus da
vezañ direnket kement-se a dud.

Eurus eo koulskoude.

Ne ouie ket e oa eñ, ar c'hazhig
skañv-e-benn gant e lunedoù gwenn
en-dro d'e zaoulagad, karet gant ke-
ment-se a dud. Sec'het en deus neuze
gant e bav an daeloù o ruilhañ hag
gant furnez en deus lavaret :

— 'Rin ket ken !

Krediñ a rit anezhañ, sur a-walc'h?

EMBANNADURIOU
AL
LIAMM
Brest

1



LEVRIOU AR VUGALE